

Breman 8, ru HOCHE 35000 ROAZON

12 lwr

bremañ

GWENGOLO 1988 Niv.84




K
E
M
B
R
E

B
R
E
I
Z
H

SKOL-VEUR

GOUEL SINEMA DOUARNENEZ



Da geñver Gouel Sinema ar Minorelezhioù Broadel e Douarnenez, ez eus bet aozet pevar devezh staj er bloaz-mañ. An hini kentañ, e brezhoneg, diwar-benn "an doareoù da gas war-raok ar brezhoneg" a oa savet gant Skol An Emsav ar 27 hag 28 a viz Eost. Bodet en deus un dousennad tud. An eil, an 29 ha 30, a oa kenna-ozet gant Gouel Sinema ar Minorelezhioù Broadel ha Skol An Emsav. Gouestlet e oa da Vro mañ, hec'h istor hag he buhez a-vremañ, hag ur pemzek bennak a dud o deus gelllet selaou displegadennoù ha divizout gant an Euskariz a oa deut da Zouarnenez.

Pal an daou devezh kentañ a oa reiñ da anavezout gwelloc'h un nebeud binvioù savet gant an Emsav da gas war-raok ar yezh ha kendivizout diwar-benn o roll hag ar pezh a zo d'ober. Plijet o deus diskouezet bezañ ar stajidi : "Deut e oan d'ar staj gant ar c'hoant da c'houzout muioc'h diwar-benn poentoù reola : Stumdi, Kevredigezh an Dilennidi Vrezhonegerien ha Burev Europa ar Yezhoù Minorelezhel. Raopontet eo bet mat d'ar pezh a oan o c'hortoz" a lavar ur stajiad. "Plijus ke-

nañ eskemm mennañ" eme unan all, "mennañ a-bep deuz, a roe tu da welet penaos e vez merzet gant pep hini kudennoù an Emsav".

Ar stummadur a zo bet studiet a-dreuz labour "STUMDI" kinniget gant Joel Legrand implijet e-giz objektour er gevredigezh-se. "STUMDI" a zo e bal mont en-dro gant an ar-c'hant gouestlet an embregerezhioù evit ar stummadur dibaoez. Kinnig a ra stajoù war ar Brezhoneg, pe e Brezhoneg, met ivez e galleg diwar-benn ekonomiezh ha sevenadur Breizh. Evit bevañ e rank ivez gwerzhañ stajoù hep liamm eun gant danvez Breizh (video, luc'hskudennozh, rezh...). Dre e hanterouriezh e c'hell ivez tud kemer perzh e stajoù Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien (KEAV), "crash Course ar Skol Veur pe re all. Ezhommù bras a zo bet lakaet a-wel : da gentañ, stajoù hir (ur miz da nebeutañ) evit stummañ brezhonegerien vat a ra diouer evit implijoù 'zo. Ur raktres a zo war ar starn evit-se. Stummañ stummerien, kelennerien war ar brezhoneg evit ar c'hentelioù noz a zo ret ivez. Mankout a ra ur seurt "cursus", ur program pe ur roll-stajoù a c'hellfe bezañ heuliet evit en em varrekaat tamm-ha-tamm, pe war an danvez-mañ-danvez (yezh, istor, ekonomiezh, darempred)

AN DILENNIDI E PENN AR STOURM

Janine Sanker, kuzulierez kêr e Plabenneg ha dileuriderez Kevredigezh an Dilennidi Vrezhonek he deus kaset en-dro an diviz diwar-benn labour hec'h aozadur hag ar Brezhoneg er vuhez ofisiel.

200 ezel, e-barzh seizh kevredad, a vod ar gevredigezh. Un emvod bloaziek a vez graet ha pep kevredad en em vod bep tri miz. Broudañ a ra an tiez-kêr da lakaat panojoù divyezhek -da lidañ eurejoù e Brezhoneg, da implij hor yezh er c'hannadigoù-kêr, da skoazellañ ar skolioù, d'en em gevelliñ gant kêrioù broioù bihan all. Nevez

HANV S.A.E.

'zo o deus skrivet an dilennidi vrezhonek da zavez prezidanted ar Republik, da FR3 diwar-benn abadennoù CHADENN AR VRO ha keadetiezh. Emaint o paouez em-kademezh. Emaint o kinniget brav bann ur c'hajerig kinniget brav a vo kaset d'an holl diez-kêr e Breizh evit o broudañ da zifenn sevenadur ar vro, "diazefenn sevenadur ar vro, "diazefenn vuhez ekonomikel leun a nerzh en Europa 1992". En em harpañ a c'hellont war an testennoù bet votet gant Parlamant Europa ha war labour Burev Europa ar Yezhoù Minorelezhel. Er c'hendiviz eo bet kinniget e vefe graet embannoù ofisiel e brezhoneg er c'hazetennoù hag e vefe diskleriet ar Brezhoneg YEZH OFISIEL gant kuzulioù kêr e-lec'h m'o deus pouez an dilennidi vrezhonek. Met merzet eo bet ivez e rae diouer ur framm kenstur da hini an dilennidi e-lec'h m'en em gavfe tud mennet da c'houlenn ouzhan dud e karg mont war-raok war dachenn ar yezh ha d'o skoazellañ

Mennoz bodadoù stag ouzhan ar c'huzulioù-kêr pe brevioù lec'hel evit an divyezhegezh a zo bet meneget ivez hep donaat avat o roll hag o aozadur. Skouer an emglev savet e Brest etre kevredigezhioù sevenadurel evit mont e darempred gant an ti-kêr a zo bet lakaet a-wel. E pep kêr vras, e pep kanton da nebeutañ, e rankfe bezañ bodet komiteoù a bouezfe evit ma vefe brezhonekaet ar vuhez ofisiel.

PELECH BEVAN E BREZHONEG

Met, mard eo ret brezhonekaet ar vuhez ofisiel, ez eo pouezusoc'h c'hoazh lakaat ar Brezhoneg da vevañ er vuhez kevredigezhel. Soazig Danielou, Renerez AN OALD e Treglonou, a zispleg ar stivoù graet evit implij ar yezh er vuhez pemdez e-pad stajoù : kampoù bugale ha krennarded, stajoù bageal, marc'hegan, c'hoariva. Dont a ra bugale ha krennarded betek 16/17 bloaz, pe tud koshoc'h ouzhpenn 30 vloaz. Met, an dud yaouank ne seblantont ket ken dedennet gant ar yezh. Stadañ da

ranker e vank dezho alies an en-dro brezhonek, er gêr pe er geriadenn, er c'harter. Penaos neuze, bezañ dedennet gant ur yezh na c'haller ket implij, d'ar gwellañ, en divaez d'an ti ? Ar re yaouank all, n'eus nemet galleg ganto. Galleg eo en-dro ar krennarded. Dre ur staj bennak, avat, dre zarem-predifn krennarded evelto, eo bet gwelet tud yaouank o kavout plijadur gant ar Brezhoneg. Le-c'hioù kejañ hag eskemm a ra diouer spontus avat er vuhez bemdez evit an oadoù-se, met ivez evit ar re goshoc'h.

Brezhoneg a zo er Skol-Veur a-wechoù. Met n'eus ket en divaez. Ha lavaret eo bet e oa poent adstummañ ur rouedad kentelioù-noz unvan a zo un diazev evit ur vuhez kevredigezhel e Brezhoneg ha kreskiñ niver ar vrezhonegerien.

"BREMAN" STIZHUNIEZH ?

Kaout "media" e Brezhoneg a zo un ezhomm ivez. Kelaouennerezh a zo gant "An Taol Lagad" war FR3, ur wech ar sizhun ha gant "Keleier Breizh" R.B.I.. Met, dre skrid n'eus e gwirionez nemet "BREMAN" he deus dibabet an dachenn-se. Ar striv a zo da vezañ graet war daou du

Wellaat an danvez ha dont er-maez ur wech ar sizhun da vihanañ, evel ma rae ARVOR, hag evit-se e ranker labourat en un doare micherel. Klask ar c'hant a zo d'ober, gant harpoù ha bruderezh. Skouerioù a c'heller mont da studiañ evel "Punt Diari Catalunya Nord" (sellet

Bremañ 83) e Katalonia an Hantnoz. Bez e c'hellfed prederiañ ivez war ur geloubenn divyezhek a c'hellfe bezañ skignet en un doare kalz ledanoc'h, rak n'eo ket hepen ur gazetenn vrezhoneg a vank, met ur gazetenn he dije buhez ar vro da ziazez he freder.

MAR-DU UR SKOL-VEUR-HANV

An daou devezh gouestlet da Vro Euskadi o deus diskouezet un emsav disheñvel mat eus an hini a anavezomp e Breizh, e Su ar Vro da nebeutañ. Bodañ a ra nerzhioù kevredigezhel Euskadi, adalek ar strolladoù merc'hed betek ar c'hoiteoù enep-nukleel, ar skolioù-noz, an ikastolak, ar sindikajoù. Un emsav poblek eo, met gouezet en deus ivez en em frammañ : ar gevredigezh A.E.K. da skouer a vod an holl gentelioù noz, hag an nerzh-se a ro dezhi an tu da bezañ tud da bledifn gant an doareoù-kelenn, ha da c'houlenn pe da zastum ar-c'hant. Hep keñveriañ nerzhioù disheñvel e vefe tu d'ar Vretoned da gemer un tammig skouer war zoareoù labourat Euskariz ha da vurutellat mont en-dro ha frammadur o emsav, ar pezh n'int ket boas d'ober.

Tu a vefe da welet en ur staj evel hini Douarnenez, un danvez Skol-Veur Hañv, e-lec'h ma c'hellfe kalz Bretoned en em gavet bep bloaz da studiañ kudennoù ha divizout gant an amzer da-zont. ■ T.L.



KELEIER

BOMBEZENN E PONDI



Digwener 16 a viz Gwengolo da 4 eur hanter diouzh ar mintin, e tarzhe ur vombezenn e ti an tailhoù e Pondi. Da 7 eur e voe gelvet R.B.O Kemper, da 7e30 komiserdi Pondi ha burev an AFP e Roazon, da gemenn e oa bet graet an taol gant an A.R.B., dre ma "he statro da Vreizh nemet ul lodenn vihan eus an tailhoù paet d'ar stad c'hall gant ar Vretoned".

C'hwech'vet taol an ARB er bloaz-mañ e vefe tarzhadenn Pondi. E miz Genver eo ti an URSSAF e Kemper hag e Rektordi Roazon e oa bet lakat bombez. E miz Ebrel e oa e ti renevezh al labour e Kemper. Ur vombezenn all n'he doa ket tarzhet e ti ar "Peideuloar" e Naoned e miz Gouere. N'eo ket avat an ARB he doa lakat da darzhañ Lez-Varn Brest e miz Eost.

En noz-se ivez e oa bet skrivet luganoù (gallek !) sinet "S.A.B." war di R.B.O. e Kemper. Hervez ar bolis "our n'eo ket ur c'hendegouezh". An deiz ma vo livet mogerioù Kemper ha ma kouezho fuzenn Ariane ar C'hallaoued e vo tamallet SAB noarvat ivez !

Diskouez a ra kement-se eo prest ar bolis c'hall da ober e seizh gwellañ da gemmeskañ adarre an emsaverien sevenadurel, ha paotred o bombezennoù, evit noazout ouzh tamm levezon an emsav evit ar yezh er boblañs : ur bolis politikel eo hon eus e Breizh, evel ma voe diskouezet pa voe harzet (ha laosket da vont) tud eus Emgann e miz Genver diwezhañ.

Yann Fusteg.

DILENNADEG KANTON

Efin miz Gwengolo e vo dilennet kuzulierien nevez en un drederenn eus kantoniou Breizh hag ar stad c'hall. Daoust ma n'hor bez ke-loù ebet diganto hon eus gouezet e kinnigfe tri strollad breizhek un nebeud danvez-kuzulierien.

Diouzh ma ouzomp ne vo nemet tri evit POBL, hag o-zri e kêr Roazon : Bertrand Casteret (bet soner Avel Nevez, e Sant-Malo), Patrick Guilbert, ha Patrick Montauzier (desket gantañ Brezhoneg).

Evit EMGANN en em ginnigo Jan-Mai Salomon e Benac'h, Jean-Yves Kere e Gwengamp, ha Yann Puillandre er C'hastell-Nevez.

Evit UDB, hervez "Peuple Breton" miz Gwengolo, e vefe 9 danvez-kuzulier. Unan nebeutoc'h da vihanañ a vo, peogwir eo en em dennet Michel Genin, kuzulier kêr e Roazon. Ne vefe neuz den ebet eus UDB o'n em ginnig en 11-ha-Gwilun nag e Penn-ar-Bed.

NIVERIDIGEZH

Skrivet o deus aozadurioù nevez d'an INSEE da c'houlenn niveridigezh ar vrezhonegerien, war un dro gant an niveridigezh poblañs e 1990. En o zouez "Kreizenn Vrezhonegerien Vrest", "Skingomz ha Skinwel", "Kevredigezh an Dilennidi Vrezhonek", UDB, hag an UPBRAC ("Unvaniezh kevredigezhioù Breizhek Bro Roazon").

Gortoz a reomp bremañ ar c'hevredigezhioù sevenadurel all, ar c'helic'hioù brezhonek all, hag an tiez-kêr, ma 'z eus dilennidi vrezhonek enno, da ober kemend all ha da gas brederzh d'ar c'hazetenoù gallek.

Er-maez eus Breizh emañ ivez an I.E.O. (Institut d'Etudes Occitans) o paouez skrivañ d'an INSEE, ha prest int da aozañ boikot an niveridigezh en Okitania, mar bez ezhom.

PANELLOU



Fuloret en doa Michel Ma-zeas, maer PCF Douarnenez a-enep da gomzoù an Euskarad en doa diskleriet, en ur brezegenn diwar-benn ar stourm evit ar yezh en Euskadi, o doa gonezet panelloù euskarek dre forzh mont da liavañ ar re spagnolek.

"Biken, emezañ, ne vo panelloù divyezhek e Douarnenez gant doareoù evel-se. Prest e oan da lakaat, pa oa bet livadurioù war ar mogerioù e kêr daou vloaz so. Bremañ, echu."

Difenn ar Brezhoneg a ra memestra an aotrou Maer, rak, evel ma lavar, mont a ra da gomz brezhoneg e-barzh "Chadenn ar Vro".

An deiz war-lerc'h, kentañ a viz Gwengolo, ec'h embanne an Telegramm ur pennad o lavaret e oa bet lakat panelloù "Pont-n-Abad" dindan panelloù gallek ar ger-se peogwir e veze labezet ar re c'hallek bep an amzer hag e kouste keroc'h naostaat eget lakaat brezhoneg.

M.K.

Emiz Mezheven en doa skrivevet Emglev Bro An Oriant da Raymond Marcellin, prezidant Kuzul-departamant ar Mor-Bihan da c'houlenn panelloù divyezhek war an hent etre an Henbont ha Porzh-Loeiz.

E penn-kentañ miz Gwengolo en doa respontet Marcellin en doa gouennet digant rener ar Paramanterezh (an D.D.E.) studiañ reked Emglev Bro An Oriant, ha digant Aimé Kergeris, Kuzulier-Kanton, aozañ ur voadeg a-zivout ar gudenn ha pediñ an Emglev.

A-gevret gant e lizher e kase Marcellin evezhidennoù an Aotrou A. Laurent, ijinour. Kae-rat tra !

Hervez an aotrou-se, ne vefe ket mat heuliañ skwer Bro-Dreger (un hent nemetken !) : peogwir ne zoug ket da reolennoù ar c'helic'hizher niv.82.32 eus ar ministrerezh (4 meneg hepken war bep tu d'ar peulioù) -peogwir n'hallfe ket bezañ komprenet mat gant blenierien eus Kreisteiz pe Hanternoz Bro-C'hall (kemer an dud evit genaouiñ a ra an ijinour !!!) ;

peogwir n'eus nemet anvioù gallek war ar c'hartennoù gall (ha tud ar c'hartoù na fell ket dezho embann anvioù brezhonek pa n'eus nemet anvioù gallek war an hentoù) ; peogwir e koustfe ker (difenn ar gallek e Louisiana ne ra ket keroc'h 'hoazh ?) ha peogwir ne vez ket kenall an holl gevredigezhioù diwar-benn an "ortographie" (sic !) hag e reont "graphitis" (ad-sic !) da ziskouez o enebiezh.

Laouen e seblant hon ijinour bezañ o venegin n'eus hent ebet gant panelloù divyezhek e Penn-ar-Bed.

Mantrret eo avat o kemenn da brezidant ar c'huzul departamant n'emañ ket hervez al lezenn lakaat panelloù Brezhonek dindan ar re c'hallek, en dro d'ar bourkoù ha d'ar c'harioù. Ar panelloù gant an anv "dizielec-tañ" (sic !) a rank bezañ lakaet pelloc'h.

Evit EMGLEV BRO AN ORIENT eo arguzennoù toull a zeu gant an aotrou ijinour ha karout a rafe gwelet ar C'huzul-Departamant hag an holl zilennidi o vont war-raok gant ar panelloù divyezhek.

bremañ 7

GOUENNLAZH

Ma ne vez ket an Durked o lazhadegañ ar Gurded e vez an Iraniz pe an Irakiz oc'h ober. Amzer en deus bremañ brezelour meur Bagdad da bledañ gant e Gurded, pa 'z eus deuet un tamm peoc'h war an harzoù. Hag arabat lezel ar skiant-prenet gant an arme da vont da goll embregiñ a c'hall soudarded Sadam Hussein o tennañ war dud ordinal merc'hed ha bugale, hag oc'h implij armoù chimik "made in France". Pennoù bras ar "Broadoù Unanet" n'int ket chalet gant an dud rosted ha mouget gant patred Bagdad : un afer diabarzh eo, n'eo ket un afer "etrevroadel".

Kastizoù ekonomikel a-enep Bro Irak a zo bet lakaet gant ar Stadoù Unanet. Ne weler ket kemend all a bres en Europa...

(Gortoz a rafed maer Roazon, a zo dimezet gant kêr Diyarbakir e Kurdistan Turki, da gemenn da gannad Irak e Bro-C'hall, ne vo ket pedet ken da Foaer Etrevroadel Roazon, e lec'h ma vez ur stal gant Irak, bep bloaz, abaoe pell.)



MANIFESTIN EVIT



Ar stourmad bet kaset da benn gant GWEZENN e miz Mezheven diwezhañ evit ma vefe savet, ar buanañ ar gwellañ, un hent-trogrer e Redon a zo bet a-bouez bras evit hor strollad ; ha bez' e c'hellfe bezañ kentelius ivez, e meur a geñver, evit emsaverien-all e Breizh.

Ne oa ket ur stourmad le-c'hel hepken. Fellout a rae deomp dreist-holl lakaat war-wel an holl gudennoù pendeziek a vez en abeg d'an disrannoù melestradurel.

"Pik-estlammañ" hon stourmad a zleje bezañ bet ar vanifestadeg, d'ar 25 a viz Mezheven e Sant Nikolaz-Redon. Emgav holl stourmerien ar c'h-C.U.A.B a rankje bezañ bet ar vanifestadeg-se ivez !

Gwelout a reor bremaik perzhioù mat ha perzhioù fall hon intrudu politikel e Redon. Ne glaskin ket danevellin pep tra deoc'h dre ar munut -ur romant e vefe -. Dibunañ a rin an darvoudoù e stumm ur film ma kavoc'h ar pep reñañ da c'houzout enno.

TRI DEPARTAMANT

DIV "REGION" HAG UR PONT !

Evel ma oar an holl moarvat ez eo disrannet Bro-Redon etre tri departamant (35, 44 ha 56) hag etre div "région" ("région B4" ha "région-PDL").

En Il ha Gwilun emañ Redon ha stag eo ouzh BE. El Liger-Atlantel emañ Sant Nikolaz ha stag eo ouzh ar PDL. Stag ha stag eo an div gêr an eil ouz ebeñ. Diforc'h ebet etrezo e-keñver an dud, al labour, hag an natur. Un draig a zo memes tra : ur pont a-us da ster-Wilun. Tost da 15 000 karr-tan a vez o vont hag o tont warnañ bemdez. Gant ar stank ma vez an dreuzerien e vez stankadennoù kirri-tan forzh pegement eno. An diskoulm a vefe sevel un hent-trogrer evit aesaat ar mone-donea. E-biv da Redon e tremen -fe ar veajourien ha dreist-holl ar sammgirri.

UGENT BLOAVEZH

EVIT 5 KILOMETRAD !

Ugent bloavezh 'zo absoe m'emañ an dud e-karg o klask un emglev evit sevel an hent-trogrer : 1, 8 kilometrad e 35, ha 3,3 kilometrad e 44.

Evit an hentennad a vo en Il-ha-Gwilun e paeo an departamant 40 % hag ar "région B4" 60%

eus ar mizoù. Nevez 'zo c'hoazh ne felle ket d'ar "région PDL" paeañ evit al lodenn a vo el Liger-Atlantel. D'an departamant e vije bet ret paeañ pep tra !

Diwar ar reuz, pe d'an nebeutañ da vare ar reuz, a oa bet ganeomp en deus skrivet hor mignon bras Olivier Guichard, ul lizher da Maer Sant-Nikolaz evit lavaret dezhañ e vefe prest ar "région PDL" ac'hann 1993, da reñ ur yalc'had ivez (30 % eus ar mizoù), gant ma vefe kresket yalc'had an Il ha Gwilun...

Un emvod all a vo enta etre kuzulioù jeneral an daou departamant, ar miz-mañ. Klasket e vo dirouestlañ ar gudenn. Ur wech ouzhpenn... !

AR "REGION PDL"

A-ENEP AR VRO !

N'eo ket degouezhet an traoù e bro-Redon, e-keñver ar armerzh, en ur stad ken gwazh-all hag e kreiz Breizh. Koulskode, un dañjer bras a zo e vefe dilezet ar vro gant ar c'hêrioù bras, e kreiz un tolead o vont war zidudaat ivez. Ur c'hroazhent eo bet Redon, a-viskoazh, etre Roazhon, Naoned, ha Gwened (sterioù, hentou-houarn). N'eus ket tu da Redon a-vat bezañ gwir gêrbenn he ranvro (100 000 den) en abeg d'an disrannoù melestradurel.

Gwasoc'h a zo : an diouer a gendiorroadur etre Roazhon ha Naoned, p'emañ an div gêr-se a Vreizh-Uhel e penn div "région-programme" disheñvel ha ganto Kenstur ebet ! Ur strob eo evit ar vro. Fellout a rafe da gêr Redon bezañ ur liamm kentoc'h eget bezañ strad un hent-dall o stekiñ ouzh bevennoù dinatur ar velestradurezh c'hall.

Sevel an hent-trogrer a zlefe dres dibrennañ an traoù. Mellad un ahel-hent bras eo hag a vo o treuzin penn da benn Breizh-Uhel eus an Hanternoz d'ar C'hreisteiz : Sant-Malo, Roazhon, Redon, Sant-Nazer.

UNVANIEZH BREIZH

Hervez ar "région PDL" a-vat, ne zlefe ket tremen an ahel-hent e-biv da Redon, hogen e-biv da Nozieg. Ur straegiezh disheñvel a zo gant ar "région PDL" enta : a-enep krenn da Vro Redon.

GWEZENN O REIN LANS

D'AR STOURMAD

Fellout a rae deomp enta diskouez d'ar dud, diwar gudennoù pendeziek, fetis ha pleustret, ez eo poent bras ober he stal d'ar "PDL", an abretañ ar gwellañ, evit unvaniezh Breizh.

Divizet e oa bet prientiñ ur vanifestadeg e diwez miz Mezheven. Kinniget hon doa hor mennozh e-kerz bodadeg Veur ar c'h-C.U.A.B. d'ar 26 a viz Meurzh e Naoned. Embannet e voe ar c'helou e kazetennoù Bro-Redon e kreiz miz Ebril.

Klasket hon doa, da gentañ, lakaat kevredigezhioù brei-zhek ar vro e-barzh al luskad. Trawalc'h eo lavarout deoc'h, ne oa ket mall warno lakaat o biz bihan e rod disiou ar politikerzh... ! Divizet e voe enta sevel ur c'hengor digor d'an holl.

IL LAMM D'AR "PDL" !

Savet e voe d'ar 26 a viz Mae ur c'hengor ma voe pedet ur bern tud da zont e-barzh. Pailioù ar c'hengor a chome ar memes re ha re GWEZENN. Estreget stourmerien GWEZENN a oa er sal : Redoniz, maered, kuzulierien ti-kêr Redon... Ne oa ket deuet Maer Sant-Nikolaz koulskode... Hag eus tu-all ar Wilun e spurmantas, un nebeut devezhioù goude, banniel ar "PDL". Poent bras d'hor mignon bras Olivier Guichard bevenniñ e zouaroù. Ken buan-all e yeas honnezh gant an avel... ha tallellat voe deomp gant ti-kêr Sant-Nikolaz bezañ laeret torch sakr o "région". Biskoazh kement-all !

Maer Sant-Nikolaz a zo RPR, ha Maer Redon a zo PS. Klasket e voe gant tud'zo sankañ genn an disrann politikel gall e-barzh ! Evit blev avat ! N'omp mevelien da du politikel gall ebet, tudou...

POUEZ AR C'HEUSKOAZELL

BREIZHAT ?

Da vare dilennadegoù ar gannaded e oa kement-se. Roet e voe lamm da Olivier Guichard e Sant-Nikolaz, evit ar wech kentañ...

PRIENTIÑ AR VANIFESTADEG

Berr ha berr ! Darempred a oa bet gant tud e-karg'zo (kuzulierien kêr ha kuzulierien jeneral). Ouzhpenn 2000 trakt skignet d'ar vlenierien war ar pont. Skritelloù forzh pegement ouzh mogerioù ar vro. Follennoù -goulnadegoù bet lakaet en tier-kenwerzh (800 sinadur oc'h ober pemzekteiz). Pennadoù-skrid er c'hazetennoù.

Ur galv da zont da vanifestin a voe kaset gant bodadren ar c'h-C.U.A.B. d'an holl gevredigezhioù kenlodek d'ar c'h-C.U.A.B.

Ur gemennadenn a genskoazell a voe kaset d'ar c'hazetennoù a-berzh ar Re-C'hlas ha POBL. Kaset e voe ul lizher deomp ivez a-berzh ar PS... da veure ar vanifestadeg.

Goulnet hon doa gant sonerien, kanerien ha konterien ar vro dont da lakaat startijenn e-pad ar vanifestadeg. Chom a rejont bouzar d'hon galv a-vat... Brav e oa an amzer, ha diouzh an endervezh e oa kenstrivadegoù mell-droad Europa er skinwel.

Dont a reas ur strollad rock da bignat war leurenn ar sammgarr, tud yaouank Sant-Nikolaz, Roazhon ha Naoned ennañ. Etre tonioù hard-rock Angelica e voe teir frezegenn vihan. Komz a ris da gentañ en anv Kenor an hent-trogrer o tigas da soñj d'an dud ez e oa ezhomm bras sevel an hent-trogrer. Hogen, prest e vefemp da stourm adarre

ma ne vefe ket doujet a-dost ouzh an natur. Komz a reas Patrig le Villoux ivez en anv ar CO.TE.VI. (Kengor evit Tolead Bro-Wilun) ha Ronan Danteg e anv ar c'h-CUAB (Kengor evit Unvaniezh Breizh).

D'ar 25 a viz Mezheven e teuas tro-dro 150 manifestar. En o zouez 6 den hepken eus an diavaez : 4 ezel eus bodadren ar c'h-CUAB, un ezel eus POBL, hag ur mignon all...



UNVANIEZH

KRENVAAT AR CUAB



Ha rankout a reomp truga- rekaat izili ar c'h-CUAB ? Aes eo kompren ne c'helle ket an emsaverien a zo o chom pell diouzh Redon dont. Hogen, bez e oamp o Gwened, Sant Nazer, Roazhon ha Naoned memestra ! An emskiant broadel (pe breizhat evit lod) ne rank ket menel un dra difetis. Kenskozell pleus-trek eo da gentañ !

KRENVAAT AR c'h-CUAB

Ne 'z in ket da damall d'ar c'h-CUAB avat. Betek gouzout n'eus ket a genaoadurioù par dezhañ. Arabat tamall d'ar benveg bezañ didalvez dre ma ne ra ket an dud gentañ evel ma rankent ober. Gouzout a ran ervat ez eus tud o labourat ennañ forzh pegement. Ne aes eo chom war ribl an hent hag asan- tiñ e vefe disrannet Breizh. Klavet a reer re alies ivez broadelourien 'zo o pismigañ paour kaezh "rannvroelourien" ar c'h-CUAB. Perak stourm evit Bro-Naoned ? N'eo ket ur vro vrezhoneger eo, neketa ? Diwal- lit ! ur fazi eo !

Diazev-spered hon broade- lezh eo ar Brezhoneg.

Diazev-korf hon broade- lezh eo Bro-Naoned. Ne vo ket dieubet Breizh, keit ha ne gen- labouro ket karioù bras ar Vro a-gevret. An trec'h kentañ eo da vezañ ! Setu perak e ra GWE- ZENN he seizh posubl evit kreñ- vaat ar c'h-CUAB. Pemp kevredigezh a zo ezel anezhañ bremañ e bro-Redon.

Na laoskomp ket ur benveg ret evel ar c'h-CUAB da vont da get ...

Emil Granville.

*****PREZEGENNOU GWEZENN*****

Dont a rano Per DENEZ
d'an 20 a viz HERE e REDON
evit prezegeniñ diwar-benn
150 DEIZ HA BLOAZ
AR BARZAZ BREIZ
da 20e30 e vo
e kreizenn sokial Redon.

BREIZH

UL LIDADEG EEUN HA FROMUS !

Kemeret he deus GWEZENN perzh el lidadeg a-stroll gant BREIZH 845 ar bloaz-mañ. D'an 19 a viz Mezheven e oa. Nac'h et o doa kevredigezhioù breizhat-all a Vro-Redon kemer perzh ennañ. Re blaz (pe flaer ... evit lod) ar vroade- lourien a oa gentañ hervezo ...

Heol. Bannieloù o strakal. Bokedoù ouz ar groaz. Un tregont bennak a dud a oa bodet war dachenn an Engann : broga- rourien eus ar vro, war bouez daou pe dri a oa deuet eus Bro- Dreger.

Un tamm prezegen a reas Loik Camus en anv BREIZH 845. Komz a reas diwar-benn an diaes- terioù a vez gant Diwan ha di- var-benn 200vet deiz-ha-bloaz an Dispac'h Gall. *"Un tamm bloaz 'zo emeur o labourat empennoù ar Frañsizien a-zivout 200vet deiz-ha-bloaz an Dispac'h hag Embarnadur Gwirioù Mab-Den"* eme- zañ. *"Digas da soñj mennoziadoù ar Frankiz hag ar Gevatalded a zo un dra vat moarvat. Hogen, arabat kontañ warnomp evit neu- arabat kontañ hollvezi ar stadou..."* Evit klozañ e tigasas da soñj "e vo embannet gant ar "Convention Nationale" e 1792 e vije bet roet skoazell d'an holl bobloù o stourm evit kaout o frankiz en-dro (sik !)"

War-lerc'h Loik Camus e teuas Yann-Vark Dupont, ezel eus GWEZENN hag istorour anezhañ, da zisplegañ talvoudgezh an Istor : an abegoù da stourm hag ar c'hevneriadennoù a gaver en- ni evit an amzer a-vremañ. Seul arouezusoc'h a-se eo lidañ Trec'h Ballon an deiz a-hiriv p'emañ ar C'hallaoued o klask, ur wech ouzhpenn, distagañ Bro- Naoned diouz peurrest ar Vro !

GOUEL BALLON

845

AN DUFARIOU KELENN

0986



Evit klozañ gant ar pre- zegennoù e tigasas da soñj d'an dud e oa ar brezhoneg yezh Ne- venoe. Ne oa ket trawalc'h d'ar vrogarourien tamall atav ar Stad C'hall : poent bras e oa dezho digeriñ al levrioù deskiñ Brezhoneg ! Bezañ emsaver, n'eo ket embann soñjoù diwar-benn Breizh eo ! N'eo ket komz diwar- benn an Istor nag ar yezh ken- nebeut. Hogen, cheñch a sevena- dur da vat, eus an diabarzh !

PRIENTIN UR GOUEL WIRION A-BENN BLOAZ !

Tud ar vro o deus soñj e teue gwechall broadelourien eus an diazev bep bloaz da lidañ Trec'h Ballon. Ha klasket en doa an Emsav Kozh mont e darem- pred ganto ? Ha fellout a rae dezho mont en o zouez roken ? N'ouzont ket ? Ar pezh a ouzont eo avat e sante tud ar barrez ne oa ket an emsaverien na par na kar dezho. Un trec'h a oa.

Kanañ a reas Yann-Vark Dupont ivez ur ganaouenn bet savet a-zivout Morvan bet laz- het gant ar Franked e 818. Hag an holl ha kanañ Bro Gozh Ma Zadoù ...evel just !

Fellout a ra deomp cheñch spered ar Gouel. Trec'h 845 a oa bet a-bouez bras e Istor ar Vro. Dereat e vefe ma teufe al lidañ anezhañ ur Gouel Broadel gwirion. Ne zeuio ket an dud ivez evit selaou prezegennoù ha kanañ Bro Gozh hepken. Soñjal a reomp e rank ar Gouel bezañ diazezet er vro da gentañ ha padout a-hed an devezh : al li- dadeg diouzh ar beure, ur fest- deiz hag ur fest-noz. Setu ar pezh a zo bet lakaet da bal gant GWEZENN evit ar bloaz a zeu.

Emil Granville.




UL LIDADEG EEUN HA FROMUS



KAFEDI-TI KRAMPOUEZH abadennou-noz A-BEP SEURT

Etra ROAZHON ha DINAN (ul lec'h plijus, degemer e brezhoneg, da 25 miz eus Roazhon !!!)



D'evzh ar 4 a viz Eost 88 e-pad Eisteddfod Vroadel Kembre...

tachennoù ken disheñvel hag ar yezh hag ar sevenadur...

Dominig Kerwegant

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

59, hent

KERDRONIOU VIHAN

29000 kemper

KOUMANANT BLOAZ : 70lur

SKOAZELL : adalek 100 lur.


(1) Cymro a dalvez kement ha kenvroad.



'z eo bet... E Bro-Gembre e vez kavet seurt festoù-noz a vez graet anezho...

Ne gontin ket deoc'h an abadennoù all hon eus bet tro kemer perzh anno...

Thierry Madeg



an deskidi o weladenñ abati Ystrad Fflur. Dindan an ivinenn eo bet douaret Dfydd ap Gwily.

URANIOM

E mañ ar gompagnunezh COGEMA o paouez premañ 12 devezh...

Goulnenn a ra ar "C'huzul a-enep d'an uranium" digant ar SBAFER...

Bez e c'haller skrivañ da'n ti-kêr (56310 Bubri) evit kaoust diskleriadurioù.

Kreizenn an Arzoù Pobl e Brest a ginnig kentelioù sonerezh...

Kan ha diskant a vo studiet ivez, ha dañsoù Leon, Pourled, fisel hag all...

KEMENNADENN : Kuzul-kêr Banaleg en deus kemeret un diviz mezhus...

Stourm ar Brezhoneg a c'halv an holl vrezhonegerien hag ar Vretoned...

S.A.B. 5 a viz Gwengolo 1988

T I AR BREZHONEG a zegemer an holl vrezhonegerien hag an deskarded...

KELEIER

BERR HA BERR

Gant Philippe Audinet, a oa kelenn Brezhoneg warlene e Boulvriag hag e Kallag, eo aet ar post nemetañ a oa er C'HAPES BREZHONEG e Mezheven. E Roazon emañ oc'h ober e vloavezh-stur, en ur gelenn un nebeud eurvezhioù e Skolaj Zola. Met n'eo ket bet piaen an traoù.

E miz Gouere e oa bet anvet d'ober e staj-stummañ... e Pariz. Kement ha reiñ dezhañ darn eus eurioù brezhoneg Ronan Tremel ha klask rediañ hemañ da gelenn saozneg. C'hwitet an taol avat.

Ronan Tremel, a oa bet anvet kelenn saozneg er bloaz -mañ adarre (evel warlene), evit mirout outañ da gelenn Brezhoneg, war zigarez e wefe roet e eurioù da unan all (sellat uheloc'h). A-benn ar fin eo bet adanvet en ur skol e-lec'h ma oa a-raok o kelenn brezhoneg.

Serj Richard, a oa da vezañ entitlet e dibenn ar vloavezh-skol tremenet, zo bet skarzhet da gentañ, abalamour d'ar SNES ha d'an enseller galleg, peogwir e oa da vezañ entitlet e galleg hep kelenn galleg.

A-benn ar fin eo bet adkemeret evel mestr-skoazell ha fiziet ez eus bet ennañ 11 eurvezh-skol vrezhoneg.

Goulenn a ra Serj Richard bezañ anvet kelenn brezhoneg (A.E.). Bez e c'hall ar c'hevredigezhioù ha hiniennoù prest d'e skoazellañ skrivañ pe bellgomz d'ar Ministr pe da Rector Versailles, an Aotrou Rollin niverenn : 45.50.10.10.

Lennit al liamm

Koumanant bloaz 120 lur

(studierien, soudarded ha tud dilabour : 100 lur)

Skrivañ da : AL LIAMM
16, straed des Fours à
Chaux - 35400-St Malo



SKOL-UHEL AR VRO a gemenn deomp e vo dalc'het d'an 29-30-31 a viz Here ha lam a viz Du 1988 pevarvet saloñs al levr istorel e MONTRoulez.

Berzh a ra al levrioù breizhek e foarioù al levrioù evel hini Pariz, Brusel pe Jeneva. Kalz a dud a zeu da glask titouroù, meur a hini bet o weladenniñ Breizh. Ret e ve kenlabourat gant Burevioù an Douristelezh avat !

E miz Eost e oa bet addilennet Ronan HUON (embannadurioù AL LIAMM) e penn ar gevredigezh, Tereza DESBORDES (Horezh) ha Jean PICOLLEC o vezañ eil prezidanted, ha Yann GOASDOUE (Diffusion Breizh) an tenzor.

Bodadeg a vo ganto adarre d'ar Sadorn 17 a viz Gwengolo, e ti-kêr Landreger, da brientiñ foar Frankfurt dreist-holl.

KB.D.P., kevredigezh ar gelennerien brezhoneg e Bro Bariz zo o vont da gozañ "devezhioù-studi d'ar pevar-lamm" e Pariz, e Lille hag e Brussel.

Kreskiñ a ra niver ar skolidi vrezhonek e Pariz, ha niver ar re a ginnig ar Brezhoneg er vachelouriezh (1985 : 48 a dud, 1986 : 102, 1987 : 131, 1988 : 179) en desped da heskinerezh ar velestradurezh, ken en deus savet klemm Ronan TREMEL dirak Kengor Gwirioù Mab-Den e Jeneva a-enep ar stad c'hall.

Kentelioù Kembraeg a vo dalc'het d'ober hag lwerzhoneg a vo klasket kinnig d'an dud ouzhpenn.

K.P.D.B. - Ronan Tremel - 13 bis rue Garibaldi 93400 St Ouen - (pellgomz : 40.11.57.59)

Emiz Eost, war France-Inter ez eus bet skignet kentelioù Esperanteg (1/4 bevedez) ha berzh o deus graet. Ont a rae ur paotr da zeskiñ d'ar gomzerez, da lakaat anezhi d'ar adlavaret ha da respont d'e c'houlennoù. Kentelioù skañ e oant, gant forzh displegadurioù diwar-benn an Esperanteg, plijus-tre da selaou, ar seurt abadenenn a lak ac'hanoùc'h da grediñ oc'h speredek hep skuitzañ tamm.

Ma ! tu a vije ivez da Radio-Arvorig ha da Radio-Breizh-lizel da ginnig 1/4 eur kavout ar gelennerien prest da vont da welet ar renerien, da ginnig dezho o c'hennlabour. Ha kavet e vint ?

Skrivañ da vBREMANN - 8, straed Hoche - 35000 - Roazon (99.38.75.83)

PEDERNEG 29.10.88
d'an 29 a viz Here 1988

FEST-NOZ BRAS SKOAZELL

gant
Strobine!!
Bernard Lasbleiz
Bovelo-Marius
Sonerien Ar Bras

War fell deoc'h hon skoazell -lañ, goulennit kartennoù skoazell (30 lur an tamm) : "Sikour ar Brezhoneg" B.P. 22 - 22304 - Lannuon -

Dafar nevez ganto, batisoù savet evito, ofiserien yaouank dezho, piv int ? Jandarmed vobil nevez-flamm skouadron Pondivi, evel just. O gwel e refet gant o c'hepioù alaouret e manifestadegoù al labourerien-douar, evel bleu-nioù balan, o tifenn an arao-kaad hag ar C'HOGEMA war douaroù uraniomek Breizh, hag o stourm ouzh digresk ar boblañs e kreiz Breizh. Degemeret e vint laouen gant kenwerzhourien ar vro.

DUDI

PEURZESKIN

BREZHONEK

GWIZ OUEZ E KER

Opourmen e oa an Aotrou Eon, e karter Keryann, e Roazon, al lun beure-se, pa welas en ul liorz un hoc'h-gouez. Hag en pellgomz d'ar bomperien. Hag ar bomperien (1) gevredigezh ar chaseourien (1) ha da servijoù ar yec'hed. "Ma tu zo da denañ warnañ da lakaat anezhañ da gousked ? - Nann, gallout a rafe de'hasañ meur a liorzh. Ret laskañ anezhañ".

Dibabet neuze ur poliser da lazhañ an hoc'h : ur wiz e oa. Emañ servijoù ar yec'hed o vont da studiañ daoust ha ne oa ket an araj gant al loen. Ar poliser, zo bet lezet da vont -hag en yac'h ha dibistig, ne oa ket un den danjerus evit ar boblañs.

PARIZ-BREST, 12 EUR KARR-NIJ

Tud zo a gemer ar c'harr-nij da vont buanoc'h. Evel an 280 a dud a oa savet en Airbus ar gompagnunezh Airinter en Orly, d'al Lun 5 a viz Gwengolo, da 10 eur diouzh an noz, gant ar soñj da vont da Vrest.


Gant un eur dale, da 11 eur, e tibrade ar c'harr-nij. Erru a-us da Roazon, ar c'hommandant a gavas gwelloc'h mont war e giz : re a lатар a oa a-us da Vrest, a-hervez.

Met serret e oa aerborzh Orly. Da Roissy eta ! Degouezhet e Roissy da hanternoz... den ebet o c'hortoz ar veajerien.

Pa erru koskor an aerborzh, un eur diwezhatoc'h, eo keloù fall zo gantañ : kamb ebet ken al letioù.

Hag ar veajerien da gousket e-lec'h ma c'hallont, war ar bankoù pe war al leur.

Da 6 eur eo servijet dezhe o lein. Ha da 9e45 e loc'h ar c'harr-nij en-dro. Da 11 eur e touar e Gwipavaz. Kentel : buanoc'h ez eer gant an tren.



OBER

- 1. Live Unan
- 2. Live Daou
- 3. Live Tri
- 4. Live Pevar
- 5. Live Pemp
- 6. Istor Breizh
- 7. Kembraeg
- 8. Iwerzhoneg
- 9. Manaveg
- 10. Esperanteg

4. LIVE PEVAR

Pemzek kentel hir. Goulenn a romp digant ar skolidi gouzout skrivañ ha komz brezhoneg mat a-walc'h. Pennadoù da sevel ha da studiañ ; geriaoueg pinvidik.

Skol an Trade Derez Ober 15,00
Frahsez Kervella Yezhadur Bras ar Brezhoneg Al Liamm 63,00
Frahsez Vallee Genadur Bras Galleg-Brezhoneg 214,00
Taolenn ar C'hennadurioù Ober 10,00

5. LIVE PEMP

Rummad kentelioù a live uhel. Troidigezhioù diwar ar galleg.

30 Troidigezh Ober 31,00
Frahsez Kervella Yezhadur Bras ar Brezhoneg Al Liamm 63,00
Frahsez Vallee Genadur Bras Galleg-Brezhoneg 214,00
Taolenn ar C'hennadurioù Ober 10,00

6. ISTAR BREIZH

Bezañ e c'heller bremañ studiañ ivez Istar Breizh dre ar brezhoneg. Reizhet e vez ar c'hentelioù gant tud ampart war an danvez.

Istar Breizh (1Vet kantved-1790) Ober 21,00

- 7. Kembraeg 8. Iwerzhoneg
- 9. Manaveg 10. Esperanteg

Tu zo da zeskiñ ar peder yezh-mañ dre ar brezhoneg. E brezhoneg emañ al levrioù. Kasennoù evit ar c'hembraeg hag an iwerzhoneg. Ar rummad kentelioù manaveg a vo digoret a-benn Pask. Evit ar pevar rummad-mañ skrivañ war-eeun da Ober evit kaout titouroù.

Skol OBER
Gwaremna Leurven
22310 PLUFUR
© 96.35.10.22

FINVSKEUDENNEREZH BREIZH 1988



Da geñver devezh Breizh, e Gouel ar FInvskeudennerezh e Douarnenez eo bet roet ar prizioù-mañ :

■ Ar "Grand Prix du Reportage" zo bet roet da "Pour une poignée d'infidèles" ur film savet gant Jean Rivel ha kaset da benn gant an AVEC ("Association pour la Valorisation des Echanges entre Cultures Différentes") diwar-benn beaj 5 labour-douar eus Breizh da vro ar Galached, ur bobl eus ar Pakistan (3000 den a-hervez, n'o deus ket pleget d'an Islam gwech ebet).

■ Ur meneg evit ar perzhioù tek

-nek zo bet roet da'r film MILL gant Thierry Compain, ur film boemus o c'hoarvezout e Enez Veur.

■ Da WERZ ha da VILL eo aet priz an arvesterien.

■ Daou film-video zo bet enoret ivez : "EMGAV", gant Paul-Andre Picton, kaset da benn gant FR3, "Lorient, de l'Océan jaillit la Lumière" gant Philippe Legrand ha Jean-Claude Tonnerre.

Ar film-mañ, Gwerz ha Milli, zo tri film a zo bet skoa-sellet gant Skol-Uhel ar Vro.

LENNERIEN VAT

N'omp ket evit gouzout petra c'hoarvez en ho pro ma ne gasit ket keloù dimp. Gortoz a reomp eta diganeoc'h keleier, pennadoù, tammoù kazetenoù zoken, lizhiri, alioù...

BREMAN

skoazellit
"bremañ" ho kelaouenn
koumanantit,
adkoumanantit buan !
120 lur ar bloaz nemetken !

8, STRAED HOCHÉ 35000 ROAZON

Geriou kroaz

miz Gwengolo

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX
1									
2									
3									
4									
5									
6									
7									
8									
9									
10									

A-LED

1. Klevet digant an durzhunell -
2. Araogenn- Tomm he zoull -
3. Rakger- ...dezh ! - Evaj -
4. Heg - E-giz an dilhad strizh -
5. Prof - Mat gwechall -
6. Yao - Douget gant ar merched dreist-holl -
7. A-raok an troad - Danvez-tarzh -
8. Penn-tiegezh - Div c'hoar -
9. Ger-mell - Distruj a ra - Eus bezañ -
10. War kirri zo - Notenn - Devezh -

A-SERZH

- I Dourek ha ruz - Mont ay a da voged -
- II Dav eo diwall outañ war an hent - Divat -
- III Ribl - Pesked -
- IV Erer - Arme -
- V Goids - Deret -
- VI Loened flour - Mont ay a da vloed -
- VIII Gede - Dont a ralo da ger'hat ac'hanoc'h -
- IX Gouezet - Ger-mell -

RESPONT GERIOU KROAZ MIZ EOST

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX
1	P	E	S	K	E	D	E	D	
2	Q	T	A	T	A	D	A		
3	U	H	E	L	L	A	O	N	
4	R	R	A	E	C	H	E		
5	E	N	E	H	E	V			
6	N	A	D	O	Z	L	I	E	
7	N	E	A	L	E	L			
8	A	N	N	O	A	R	L		
9	D	E	N	R	I	I			
10	U	R	A	T	A	V	N		

Pajenn ar vugale !


Ur gornigell

gant Mich Beyer

Ret eo deoc'h kaout : 1 tamm kartoñs kalet

1 alumetezenn

1 bont lij



- 1- Tresit war an tamm kartoñs ur c'helc'h 6 cm e dreuzlinenn, ha grit 8 lodenn ennañ. Didroc'hit ar c'helc'h. Livit e lodennoù e : glas, gwer, melen, orañjez, gell, ruz, roz ha mouk.
- 2- Didroc'hit un tamm bont.
- 3- Gant un tach, toullit ar c'helc'h hag ar bont en o c'hreiz. Dre an toullig, lakit an alumetezenn, lemet diouti he beg ruz, da dre-men.



setu tout !!!

Ha sellit mat ouzh liv ho kornigell pa droio !!

fri-furch

C'hoant hoc'h eus eskemm lizhiri gant Bretoned a oad ganeoc'h ? Pe eskemm timbroù, luc'hskeudennoù, levrioù, kartennoù-post, pladennoù hag all... ?

Kasit ho kemennadennoù da
b/PAJENN AR VUGALE"

HO SKOL A EMBANN
UR GELAOUENN ?
KASIT BUAN KELOU !



C'hoariomp!

1	M	A	T
2	M	A	B
3	M	A	N
4	R	A	N
5	T	A	N
6	T	A	D
7	R	A	Z



Debrit kez !
Speredekoc'h
e vlot !

- 1- N'eo ket fall.
- 2- C'hwiz zo hini ho tad hag ho mamm.
- 3- Kinvi.
- 4- Ul loen a lamm.
- 5- Deviañ a ra.
- 6- Hini Nedeleg zo gwisket e ruz.
- 7- Ul loen a red.

Kig logod
n'eo ket fall
ivez !



MESK DIVESK

Garan ar Meur

Bale ha pourmen er c'hêrioù a zo un dudi ma ne zic'hañs ket deoc'h lakaat un troad war ur c'haoc'h-ki ben-nak. Un darvoud rouesoc'h-roue-sañ dre m'emañ ar Frañsizien ar re gentañ e-keñver niver an aneveled-ti. Abalamour da se

.e vez paeet muioc'h-mui a dailhoù pa vez implijet tud da naetaat ar straedoù,

.e vez astennet muioc'h-mui betoñs ha ter er c'hêrioù, hag e vez gwelet nebeutoc'h ar geot hag an douar,

.e vez gloazet ur bern tud en ur risklañ war ar fank (650 den a vez kaset en ospital evit-se e Paris bep bloaz).

Perak ne vez ket krouet un tell-gastiz pounner evit pep kac'hadenn evel e Singapour hag en U.S.A. (500 \$ an taol) pe e Bro-Suis (1000 lur ar vro evit ar wech kentañ, 2000 evit an eil) ?

Pe perak ne vez ket difen net kaout al loened lous-se evel e Rykjavik, kerbenn Island? Pe neuze peur krouadurioù nevez ar skiant : chas pe kizhier seven evel an den ? ■

Un arnodenn a zo bet graet e YALE gant S.MILGRAM war-lene. Evit sevel ur studiadenn diwar ar memor, e oa bet dibabet a-bep seurt tud (paour ha pinvidig) war-lerc'h ur c'halvadenn e kelaouennoù ar vro. Al labour kinniget a oa aes-tre : pouezañ war un nozellenn evit distagañ stokadoù tredan kreñvoc'h-kreñvañ d'un den, "ur bugel", a veze gwelet dirak. An diskargadoù tredan a oa etre 15 ha 450 volt, met displeget e oa bet ne oant ket evit ober droug pe boan. Ur c'hoarier a-vicher a oa e gwirionez e plas ar bugel : pa sante 75 V, e klemme ; da 110V e c'houlenne e vefe paouezet gant an arnodenn ; war-dro 300V e rae van da vezañ war e dremen van.

Ha petra c'hoarvezas gant an dud implijet : dirak klemmoù pe hopadennoù, pe azgoulennoù ar bugel ? an div drederenn anezho a gendalc'has memestra gant o diskargadoù tredan. Gwelloc'h dezho gwelet un den o c'houzañv eget disentiñ ouzh galloud ! Peseurt diforc'h etre ar gouzere hag ar "Sevenadur-rezh" ? ■

Ijinennoù. Da gentañ, un douchenn aotomatek : ibil ebet da dreiñ pe da zistreiñ evit kaout dour. Astennit un dorn, un aotenn pe ur vroust-dent dindan ar gorzenn hag e tivero an dour ; tennit anezho hag e vo lazhet an dour-red.

Sed ur gavadenn a vo laouen bras HUTUS ar BURUNDI ganti. Peur ur serr-prim aotomatek a santo ezhomm an dud da zizou-rañ ? ■

Unan all : ur voest-lizher aotomatek. Bep miz e vez gortozet ho gazetenn (Bremañ evel-just) ganeoc'h met p'emaoc'h c'hoazh en ho kwele, n'ouzit ket hag-eñ eo tremenet paotr-al-lizhiri gant e bakad-paperoù. Dinec'het bremañ gant ar voest-mañ : pa vo stlepet Bremañ enni, e c'hwitello ur c'hornig-boud pe ur c'hloc'hig en ho ti. Pa vo lakaet paperoù pub droch enni ivez. Ur gavadenn a vo frealzet Kurded an I-ran hag an Irak ganti. ■

Gwechall edo ar monroù hag an orolajoù gant div pe deir nadoz oc'h ober o zroioù, sioulik ha didrouz, en-dro d'un dremm. Betek ma vefe ijinet ar monroù kwartz dinadoz, gant un nebeut sifroù sterniet en ur voestig karrez, tric'horniek pe pempkorniek... Hag ur c'hloc'hig, ur bip-bip a zo bet lakaet war an darn

vrasañ anezho da darzhañ pep eurvezh, pa n'eo ket bep hanter eur.

E-kreiz ur film, bip-bip, e-kerz un emvod : bip-bip, en ur c'harr-boutin : bip-bip ; en ur labourat : bip-bip ; p'edo hanteret ur varzhoneg : bip-bip En arched hag er vered : bip-bip. Neblec'h ne vez disoñjet ar varc'hadourez. Bip-bip. ■



Ur servij pellgomz nevez e Montreal : kentoc'h evit kas ur pellskrid gant an ti-post, e kasit un den da lenn pe da ganañ ho komzoù d'ho mignon pe karedig. Ma n'eo ket gourc'hemenoù a zo da reiñ, memestra : ur vriad kunujennoù

a c'hello bezañ dibunet ivez.

Ma vefe kinniget ur seurt servij gant ar P.T.T. e Breizh, ne vefe ket gwall sioul ken dibennoù-sizhun ar pennoù "bras", kannaded, kuzulierien pe kargidi ar stad. ■